

Pempvet remzi ar pellgomzerioù hezoug

Dibabet ez eus bet teir c'hêr e Breizh evit arnodañ binvioù pempvet remzi ar pellgomzerioù hezoug (5G) : Roazhon, Naoned ha Lannuon, hep soursial kalz eus soñj an annezidi enno. Roet ez eus bet da c'houzout e 2017, koulskoude, gant 170 a glaskerien eus 37 bro e oa diasur efedoù an deknologiezh-se war ar yec'hed hag an endro. E kêrioù zo eus Europa, evel Brusel, ez eus bet berzet implij seurt binvioù keit ha ne zeuio ket anat ez int dizañjer.



Savlec'h stignoù evit rouedad gwagennoù 5G ar pellgomzerioù hezoug.
© Tadej

Kresket e vo nerzh ar gwagennoù elektromagnetek en endro gant seurt binviji ha chalet ez eus kalz skiantourien gant ar seurt kresk. Hervez ar Greizenn enklask etrebroadel war ar c'hrign-bev, ur servij eus Aozadur bedel ar yec'hed, e c'hell ar gwagennoù elektromagnetek degas ar c'hleñved-se. Kinniget e oa bet an trede hag ar pevare remzi evit aesaat an darempredoù etre an dud. Ijinet e oa bet ar pempvet remzi pa glasked derc'hel kont eus ezhommoù ar binviji, evel ar yenerezioù, ar c'hannerezioù, ar c'hirri emgefreak, ar c'hameraioù evezhiañ. Kenrouedad ar mekanikoù eo. Gant an deknologiezh nevez e vo kalz aesoc'h pellgas roadennoù eus an eil mekanik d'egile, ha diouzh ur mod efedusoc'h. Evit kreñvaat tizh ar roadennoù e ranker kaout muioc'h a vannou drafet. Re garget e vefe ar bannoù drafet a reer ganto betek-henn evit pempvet remzi ar pellgomzerioù hezoug. Ne dreuzont ket mat ar mogerioù hag e

c'hellont, ouzhpenn-se, bezañ lonket gant ar glav hag ar plant. Ne c'hell ket roadennoù ar pempvet remzi bezañ kaset gwall bell ouzhpenn-se. Evit diskoulmañ ar c'hudennoù-se e ranker kaout muioc'h a stignoù. Lakaet e vo reoù bihan ouzh ar peulioù, ar c'hleuzeuregoù hag en tier zoken, tost-tre an eil re d'ar re all. Beuzet e vo an dud, evel-se, en ur vrumennad tev diwelus a wagennoù elektromagnetek ha na c'hellint ket mont hebiou dezhi.

➔ AZONOÙ KLINIKEL LIESSEURT

Gwir eo n'eo ket anat ober, en ur mod skiantel difazi, al liamm etre ar gwagennoù elektromagnetek hag an azonoù klinikel a lavar lod eus ar servijoù mezegel e vezont degaset ganto. Estreget ar c'hrign-bev a vefe hervezo. Liesseurt e vefe an azonoù-mañ : kernadoù (poanioù-penn), drougoù koubloù ha kigennoù, nozvezhioù digousk, boudinellerezh skouarn, strafuilhoù ar c'hounerezh, dieveshaat, heugennoù,

gouvidoù (diwaskadennoù nerval). Reiñ a ra tud da c'houzout n'int ket evit padout ouzh ar gwagennoù elektromagnetek hag eo deuet o buhezgezh da vezañ un ifernite dre ma vez beuzet muioc'h-muiañ an endro gant seurt gwagennoù. Renket eo bet o allergiezh e-touesk ar nammoù gant servijoù ar yec'hed e Sveden hag e meur a hini eus Stadoù-Unanet Amerika zoken. Soñjal a ra lod eus ar vedisined e vefe seurt azonoù re ur c'hleñved psikosomatek. Beverkerioù boutin zo bet kavet koulskoude, etre an allergiezh ouzh ar gwagennoù elektromagnetek hag an allergiezh ouzh danvezioù kimiek, evel an diastuzerioù.

Hervez skiantourien zo e vefe nozus ar skingasadennoù elektromagnetek evit ar yec'hed ha pa vefe dister o nerzh. Tost da 2450 megahertz eo talm ar skingasadennoù-se. Gant ar seurt talm e c'heller lakaat mesk er molekul dour. Implijet e vez ar galloud-se evit poazhañ boued er skinfornioù. Peadra zo d'en em soñjal diwar-benn o efed war ar c'horf pa ouzer

ez a an dour d'ober 60 % eus korf un den en oad, ha tost da 80 % eus hini ur bugel nevez-c'hanet, ha pa ouzer e ra kelligoù ar boudoù bev kalz eskemmoù kimiek ha tredanek kenetrezo. Reiñ a ra ar skiantourien-se da c'houzout e c'hell ar gwagennoù elektromagnetek kaout efedoù drastus war ar genoù ha war meur a labour organek, evel ar produiñ melatonin.

➔ DISOC'HOÙ ENKLASK AN NASA

Studiet e oa bet efedoù ar gwagennoù elektromagnetek war ar c'horf gant an NASA e 1981. Klask a rae an aozadur-se gouzout ha dizañjer e veze ar beajoù graet er-maez eus aergelc'h hor planedenn evit an astraerien, lakaet ma vije ar re-se da dreuziñ gant o fuzeennoù takadoù karget a wagennoù elektromagnetek kreñv-sponsus. Kavet e oa bet ar memes efedoù hag ar re a gaver el listenn embannet gant an aozadurioù a ra war-dro an dud a lavar ne c'hellont ket padout ouzh seurt

gwagennoù. Merzet e oa bet gant ar skiantourien ez ae an efedoù da get pa ne veze mui tizhet ar c'horf gant gwagennoù elektromagnetek. Ouzhpenn tregont vloaz zo e oa bet graet ar studiadenn-se, ha daoust d'he disoc'hoù e oa bet lezet kompagnunezhioù d'ober berzh war dachenn ar pellgomzerioù hezoug hep kelaouiñ ar vevezerien diwar-benn an dañjerioù a c'hellfe degas an deknologiezh-se. Anat eo e oa re vras ar gounid gortozet ganto war ur seurt marc'had.

PaM

Azon : anad ur c'hleñved, kemm er bevedeg stadet gant ar mezeg pe displeget gant ar c'hlañvour o reiñ tro da anavezout ar c'hleñved (*symptôme* e galleg).

Bann drafet (pe draf) : *bande passante* e galleg.

Beverker : dezverk biologel muzuliadus ha stag ouzh un argerzh bennak (*biomarqueur* e galleg).

Gouvid : diwaskadenn, diwaskadur, e-keñver spered (*dépression* e galleg).

Heugenn (b.) : gwezhiad heugniñ (*nausée* e galleg).

Kleuzeureg (b.) : post lamp (*lampe* e galleg).

Koubl : pleg un ezel, en tu diabarzh pe lec'h juntañ daou askorn pe veur a hini. Heñvelsterioù : kenvell, mell, junt, arz (*articulation* e galleg).

Chuva é Cantoria na Aldeia dos Mortos, ur veaj e paradoz an Indianed



Chuva é Cantoria na Aldeia dos Mortos ("Glav ha kan e Kêriadenn ar Re Varv") eo titl ur film savet warlene gant ar Vraziliaedez Renée Nader Messora, asambles gant ar Portugalad João Salaviza. Ur veaj war zouaroù an Indianed Krahôs, e Brazil. Iñjac, un Indian yaouank, nevez kollet e dad digantañ, a zo un dra dibar ennañ : ar galloud da vont e darempred gant ar re varv. Nac'h a ra mont da chaman avat, ha rak-se e ra e soñj da vont kuit a-ziwar-dro e bobl hag e dud, dezhañ da ziank diouzh ar speredoù. Setu ma'z a e kêr. Met en ur gempenn all e vo paket ahont : pehini a vo e blas, eñ un Indian, er gevredigezh vraziliat a vremañ ? Sed aze 'ta ur boemus a film, koulz e-keñver antropologiezh hag e-keñver anaoudegezh mab-den, kement-se en ur vro gwall gaer, goloet-holl a wez, plant ha louzoù a bep ment, a bep gouenn hag a bep liv ! Er salioù sinema e vez diskouezet ar film e Frañs abaoe an 8 a viz Mae, dindan an titl **Le chant de la forêt**. Kit d'e welet !

B.V.

